



Aurélia Frey & Emmanuel Faivre

# Bourbl ar re Dianket


3 Ebrl  
> 14 Even  
2026

Ma anv :

Ma anv-bihan :

**D**onemat en diskouezadeg nevez-mañ er C'hledour !  
Amañ e weli hag e klewi skeudennoù ha sonioù savet get Aurélia Frey hag Emmanuel Faivre. Da gas a raint àr roudoù ar vartoloded vreton a oa aet da vorueta àr ar morioù skornet en Island.

Istoerioù zo hag a vez tavet get ar mor.  
Istoerioù disparti, istoerioù tud hag a vez é c'hortoz, didrouz.  
Digor da zaoulagad, selaou ha deus a-barzh ar sarac'h...




**A**dal ar XV<sup>vet</sup> kantved ha betek un tammig oc'hpenn kant vlez zo ec'h eus bet martoloded é tizouariñ ag ar porzhioù e Breizh.

Pa vezent àr an douar bras,  
get ar mor e vezent galvet.  
Pa vezent àr vor,  
er gêr e nije o spered.

Monet a raent pell-pell, betek Island,  
evit morueta.  
Pell e pade ar veaj.

Yen e oa.  
Ar mor a c'helle bout dañjerus.  
N'int ket daet razh en-dro.



### Dit da c'hoari !

(Lak ur groaz dirak ar respont pe ar respontoù choazet genit)

Petra zo kaoz e ta c'hoant d'an den da vonet kuit, da'z soñj...

- C'hoant da redek an avantur vras
- Re a c'hlav er vro
- Galv ar mor
- Ar c'hoant da welet lec'hioù nevez
- Afer a c'hounit argant evit harpiñ ar familh

... ha petra zo kaoz e ta c'hoant d'an den da zonet en-dro ?

- Diover ag an dud a garer
- Kaeroc'h eo ar c'houmoul amañ
- Ar c'hoant da adkavet douster an tiegezh
- Evit em santiñ e surentez
- Evit danevelliñ e veaj

Kelc'h an objedoù a veze gete e-pad o beaj :



# Sellet, selaou, faltaziñ

Te a ya da zonet a-barzh un istoer, ma vo kavet :

- dremmvroioù
- objedoù
- tudennoù

Estroc'h evit luc'hskeudennoù zo da welet en diskouezadeg-mañ

Sonioù zo da glevet ivez : trouz ar mor, an avel, ar skorn.  
Meur a wezh n'eus ket hani àr ar skeudenn.  
Mes santiñ a reer ec'h eus bet unan é tremen.

Kerzh dousik. Sell e-pad pell.

## ***Dit da c'hoari !***

E-mesk an tri zra-mañ, kelc'h an hani a gaver meur a wezh àr skeudennoù an diskouezadeg.




Àr razh al luc'hskeudennoù er gweler a-bell, en disheol, peotramant er splannder bras.

Abalamour da betra, da'z soñj ?

(Lak ur groaz dirak ar respont pe ar respontoù choazet genit)

- Evit aroueziñ galv ar mor
- Evit tenniñ d'un drolinenn, d'un eñvorenn
- Evit diskouez pegen bihan eo e-skoaz an dremmvro bras-meurbet
- A-gaoz m'emañ é koach
- A-gaoz d'al luc'hskeudennour en deus ankouaet bout tost

# Tasmantoù mor



Ar re « Dianket » eo ar vartoloded ha n'int ket mui, namet e talc'hant da vout en ur mod arall.

O damwelet a c'heller :

→ a-barzh un ti goullo

→ àr-dreñv un objed ankouaet

→ e stumm un drolinenn, gozik diweladus

Meur a wezh e spurmanter :

ur bugel, ur pesketour

Ha gwirion int ? Pe n'eus namet eñvorennoù anezhe ?

---

## Dit da c'hoari !

Klask al luc'hskeudenn-mañ en diskouezadeg ha sell pizh doc'hti.

Te 'gred ec'h eus bet unan bennak é tremen dre amañ ?

Abalamour da betra e kredez kement-se ?

Faltazi e istoer :

---

---

---

---



# Sav da oueletenn-te

E bourzh ur oueletenn e veze graet ar veaj hir-se get ar vartoloded trema Island. O zi, o lec'h labour hag o repu e oa àr un dro, a-bad mizioù ha mizioù.

## **Dit da c'hoari !**

Hañval genit ec'h ous àr ar pont :  
ar c'hoad é strakal, an avel é c'hwezhiñ er gouelioù,  
blaz an halen, ar pesked, trouz an houlennoù é stokiñ doc'h ar c'houc'h.

Prest eo da oueletenn da loc'hiñ... dit da roiñ buhez dezhi.

→ Evit sevel da oueletenn, goulenn ur patrom en degemer pe moull-eñ e lec'hienn Internet ar C'hledour



# Kalet e oa buhez ar vartoloded en bouzrh

Yen-sklas e oa. An avel a foete o dremmoù hag hep arsav e veze hejet ar vag get ar mor. Noz-deiz e labourer ar vartoloded, skornet o daouarn ha gleb o dilhad.

Kousket a raent a-barzh gweleoù bihan, stok-ha-stok, luskellet get an houlennoù. Pell doc'h an douar bras, doc'h o familh, e oa o spered er gêr, é soñjal e toemder an ti, hag en deiz ma c'hellehent distroñ.

Dafar : ur re sizhailhoù, peg ha kreionoù.

→ Evit sevel ar vag-se, didroc'h ar c'houc'h, ar gwernioù hag ar gouelioù, gra ur pleg a-hed al linennadoù pikoù ha peg an tammoù an eil re doc'h ar re arall.

→ Div lurell ar gouelioù zo da begiñ àr ar gwernioù ha div lurell ar gwernioù zo da begiñ àr strad ar c'houc'h.

E-raok didroc'hiñ e c'helli tresiñ ha liviñ da oueletenn, dezhi da vout dishañval doc'h ar re arall.

Chañs vat dit martolod !



# Piv eo an aozerion ?



© Jack Carrot

## Emmanuel Faivre


Emmanuel a selaou ar bed. Eñ zo bet éc'h enrolliñ :  
trouz ar mor sioul,  
trouz ar mor rust,  
son ar skorn tapet ag an diabarzh pe ag an diavaez.  
Selaou a ra pervezh ha kemer e amzer.

## Sevel a ra klevedvaoù

### Dit da c'hoari !

Kerzh e-kreiz-tre an diskouezadeg ha selaou pervezh doc'h ur son.  
Petra a glevet ? A-ven e ta ?

Liamm ar son pe ar sonioù ac'h eus klevet doc'h ar bir mat.



## Aurélia Frey

Aurélia a gont istoerioù diàr skeudennoù.  
Awenet eo get al lennegezh.

Labourat a ra diàr ar gwirvoud :  
ar mor, an tier, an objedoù...

Hag hor c'has a ra trema an hunvreoù :  
tasmantoù, barzhoniezh, faltazi.


Luc'hskeudenniñ a ra ar pezh a chom.  
Bourriñ a ra doc'h ar pezh a ziviner, muioc'h evit ar pezh a weler.

## Sevel a ra skeudennoù

*A-wezhioù e sav ul luc'hskeudenn diàr meur a skeudenn :*

### ***Dit da c'hoari !***

Klask gouiet a-ven e ta pep tamm ag al luc'hskeudenn.  
Evit sevel ar skeudenn-mañ he deus graet get :



•

- Livadur ur bugel àr ur gartenn-bost



•

- Ul luc'hskeudenn ag ar vrumenn



•

- Ul luc'hskeudenn ag ur bugel moulet àr ur blakenn wer



•

- Ul luc'hskeudenn ag un dremvro tapet geti en Island

# Choaz al luc'hskeudennourez

Ul luc'hskeudenn a c'hell bout tapet e div feson :

Er furmad GWELEDVA



- Ledan evel an dremmwel
- Evit roiñ da welet ul lec'h
- Evit degas c'hoant da hunvreal

Er furmad POLTRED



- A-vent get un den
- Evit diskouez ur sujed a bouez
- Evit ma vo bamousoc'h an traoù

E-leizh a luc'hskeudennoù zo er furmad gweledva en diskouezadeg.  
Mes un nebeudig luc'hskeudennoù zo er furmad poltred.

## **Dit da c'hoari !**

Klask ar skeudenn-mañ en diskouezadeg  
Diskouez a ra ur vag hag he deus graet peñse en ur fjord.

Pesort furmad zo bet choazet get Aurélia Frey evit he luc'hskeudenn ?  
(Kelc'h ar respont mat)



Gweledva

Poltred

D'ober petra ?

(Lak ur groaz dirak ar respont pe ar respontoù choazet genit)

- Evit ma vo gwelet bras-meurbet
- Evit arvestiñ doc'h an dremmvro
- Evit ma vo gwelet evel un dudenn

Penaos eo al luc'hskeudenn-mañ da'z soñj ?

bamus       trist       sioul       spontus

farsus      traoù arall : \_\_\_\_\_

# Atalier faltaziñ, da levr-bourzh

## **Dit da c'hoari !**

Hañval genit ec'h ous àr vor da vonet trema Island.

Kloka da levr-bourzh...

Ma anv-bihan martolod :

---

Da zeiz an disparti, ar santimant am eus :

---

Ar pezh a ra aon din dreist pep tra :

---

## **Bnav !**

Achu eo da levrig bremañ. Gellet a ri gwelet ar reizhadennoù en degemer pe e lec'hienn Internet ar C'hledour.

# leKiosque

---

Evit pep diskouezadeg e kinnig skipailh  
ar C'hledour gweladennoù heñchet  
a-hiniennoù pe a-stroll. Miret dre bostel  
pe e degemer ar C'hledour.  
Monet e darempred genomp  
d'an 02 97 01 62 27  
Digor bemdez  
10e-1e / 2e-6e  
Hanterouriezh sevenadurel  
contact.kiosque@mairie-vannes.fr

